

- 67 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

108. ROSMELCHON

(follennoù 66-68)

Maharidik a lavare

De zad a de mam ag an deñ se :

- Me nen din ked dar varadek,
Gant Rosmelchon on gourdrrouzet.

E zad ag e vam a respontas
Da Vaharidik pa he c'hlevas :

- Dar varadek hui a ielo
gourdrrouzit° an eb a garo. ° Komp.: gourdrrouzet

Maharidik a welle

Deus ar ger pa partie :

- Adieu va mam, adieu va zad,
Biken no koel va daoulagad.

A c'houi oll, domestiket va zi,
Biriviken no koelan mui.

+

Na Rosmelchon a lavare

De palifrinier ag an deñ se :

- Savomp var'hoas deus ar beure
Ma zaïmp var mez d'ober eur balle.

- Me a vel erru eur c'hadik ven,
Eur podad lez gati var e fen.
O Doue, kaera fumelen.

Na Rosmelchon a lavare

Da Vaharidik ag an deñ se :

- Maharidig, entreit en ti
Ma himp on daou da zijuni.

- 68 -

- Dijunet a leinet e din
En Kervezennek a verenni(n).

Maharidig deut er c'hampchou
Da choas o lod an avalou.

- Ne meus ket affer o havallo
Ho c'hroc'hen a kavan c'hoëro.

Te(r)c'hed, otrou, ma tremenin,
Pehet o heus abalamour din.

- Maharidig, deud dar jardrin
D'ober eur boket lozou fin.

- Ne meus ked affer o bokedo
En Kervezennek a zeus kanvo.

- Evid beza en Kervezennek kanvo
Ne ked c'houi, Maharid, o dougo.

- Bugale ar breur ag ar c'hoar,
Sellit, otro, pegen(t) nez kar.

Te(r)hid, otro, ma tremenin,
Pehet o heus abalamour din.

.....

- Otrou, roit din prest o gontel
Da tre(h)i kroc'hen va feren.

Ne voa ked e feren a kignas
En he halon (e) en plantas.
A var e bizach dan douar e koëas.

Ne voa ket Maharid ker decedet
Ma voa ar c'helou en Kervezennek.

Kervezennek evel m'en klevas
Da Rosmelchon prompt a deuas.

- Bonjour a joa bars an ti-man.
Va fillorez e pelec'h emañ ?

Ar balafrenier a respontas :
- Eman duze er gamp decedet.
Ma neum c'hredit, id da vellet.

- 69 -

Kervezennek a lavare
Dar palafrinier ag an deñ se :

- Palafrinier, din leveret,
Na Rosmelchon pelec'h eo ed ?

- Saved eo bed deus ar beure
Ed e var ar mez d'ober eur bale.

- Pa vez var en hentchou bras o verheta
Palafrinier, te a vez gantan.

Ma na levez pelec'h eman
Me a lakeñ ta c'hoad da ienan.

+

Kris a vije ar galon na voëlche
Da Rosmelchon a neb a vije,

E vellet ar pave a^o ruja ° Komp. : o ruziañ
Gant goad Rosmelchon e skuilla

Kervezennek oc'h e laza.

vvvvvvvvvv

Marie Bozeg, 18 févr. 1851.

vvvvvvvvvvvvvvvv